

(407)

Disput
Entre eur Vamm hac he Merc'h,
pehini a fellie dezi demerzi
Da eur Zoudard pe da eur Mantolod.

Var eun ton joais.

Ar Ver'h.

Va mam, va demerzit, me gar oll tud ar Roue;
Va mam, grit an dra-ze,
Me a gar an arme.
Charmet eo va c'halon pa glêvân taourinou;
Pa velân ar rejimant'hon:
Aneze e meus c'hoant
Da choaz eun den yaouane.

Ar Vamm.

Va Merc'h, meurbet oc'h sot da zonzal en armeou;
An dud a barlanto,
Ha chagrin ho pezo;
Hep e sonjot en drouc, sur e rezo lavaret:
Homañ gant ar zoudardet,
Hac an oll dud a vôt,
A gollo he enor.

(408)

Ar Ver'h.

Comzet nep a garo; laqet e meus em speret
Caret an dud a vôt,
Ar re-ze o deus enor.
En instant ma o quelân, e rejouis va c'halon;
Eno e m'ân va mignon:
Anezo e meus c'hoant
Da choaz eun den yaouane.

Ar Vamm.

Va merc'h, en amzer - m'ân n'estimer get ar merc'h
A dal ma vent güelet

330

O couz gant soudardet,
 Abalamour d'o habit, pehini zo scandalus,
 D'ar merc'het ger danjerus:
 D'ioiallit hoc'h enor
 Ouz an oll dud a vör.

Ar Verc'h.

Va Mam, an dud a vör a zo tud rejouisset,
 Merdaidy, soudardet,
 A gontant va speret;
 Me en em fis enne mui quet eun den souchet,
 Godisserien ar merc'het,
 Dioute e meus c'hoant
 Da choas eun den yaouanc.

(409)

Ar Vam.

Va Merc'h, me garfe güell dec'h caout eun den a vicher,
 Bourc'his, pe paysant,
 Intaon, pe den yaouanc.
 Lezit an oll dud a vör, chassait - hi eus ho speret,
 Pe e viot disprizet
 Gant an oll merc'het all,
 Ha laqet eur plac'h fall.

Ar Verc'h.

Va Mam, ar botriet vras zo en servich ar Roue;
 Mar dint potriet vaillant,
 E zeont bep momant
 D'an arme, p'o goulenner; ret e d'ê oboissa,
 N'o deus gard da rezista,
 Hac anê e meus c'hoant
 Da choas eun den yaouanc.

(410)

Ar Vam.

Va Merc'h, ar zoudardet couz hac ar vartolodet,
 A ra rejouissanz
 Gant arc'hant Roue Franç.
 En fin o c'hampagnou e zeont d'an hostaliri,
 Euit en em antriezeni
 Da fouetta o frusquin,
 Va Merc'h, oc'h eva güin.

Ar Ver'h.

Va Mam, hac e ve giür ec'h effent peb a vanne
 Evit en em recrei,
 O deus poan hac anui.
 Pa vezont var ar mör, int exposet en danger,
 Ha da hep seurt mizer:
 Anezho e meus c'hoant
 Da choas eun den yaouanc.

Ar Vam.

(411) Mar ho pe bugale, va Merc'h, pa viot dimezet,
 Soudard pe Merdead,
 Ho rento en goal stat.
 En a yêlo en campagn, hac e viot dilezet,
 Cetu c'houi abandonet,
 Poun ho pezo goude
 O vaga bugale.

Ar Ver'h.

Hac em be bugale, va Mam, mar bezont potriet,
 Evel ma vint savet
 Ez int da zoudardet,
 Pe da verdaidy, da reded an armeou,
 Evel ma ya an troupon;
 Eus an arme meus c'hoant
 Da choas eun den yaouanc.

Ar Vam.

(412) Va Merc'h, c'houi zo yaouanc, n'oc'h eus nemet pemzec vloas
 Abredic ez oc'h c'hoas
 Da guemeret eur goas.
 Eun daou pe dri bloavez e felle din differi,
 E chomfac'h hep demerzi;
 Neuz e vent contant
 E gemerfec'h ho c'hoant.

Ar Ver'h.

Va Mam, an exercis, ar fibr, an tambourinou,
 An oll rejouissanc
 A arme Roue Franç,

332

A laqa va speret da garout ar Zoudardet,
 Hac ar Vartolodet;
 Bremañ e rancân choas
 Eus an arme va goas.

Ar Vam.

Torit eta ho c'hoant, ha choazit ho fantazi,
 Soudard pe Vartolod,
 Va Merc'h, evit ho lod,
 Pa zeo güir an arme a ra d'ê'h rejouissanz,
 Hac hoc'h esperanz,
 Triomp gant calz a joa,
 Hon diou : Vive le Roi !

fin.

(Vol. VII, p. 407-412.)
 strophes non numérotées.